



KANTIK

PELERINED AR FOLGOAT

Diskan :

Patronez dous ar Folgoat,
Hor Mamm hag hon Itron,
An dour en hon daoulagad,
Ni ho ped a galon !
Harpit an Iliz santel !
Avel diroll a ra...
Tenn hag hir eo ar brezel !
Ar peoc'h, ô Maria !

1

Eus an Arvor, ar gourre,
Ni deu d'ho saludi ;
Holl ez omp ho pugale,
Holl ho karomp, Mari.
Tud ar gourre, Arvoriz,
Diredet omp hirio
Da bedi 'vid an Iliz,
Da bedi 'vid hor bro.

2

E Rom hag e kalz broïou
Eo gwasket an Iliz ;
Peur-laeret eo he madou
Gand enebourien kriz,
Hirra ma c'heller gwelet,
Er mor 'zeuz tarziou gwenn
Bagig sant Per 'zo strinket
Eus eur garreg d'eben.

3

Mar doc'h Mamm ar Gristenien,
 Ma karit an Iliz,
 Hebdale deuit da zifenn
 Ho pugaligou geiz.
 Araok ez a o labour
 Gant bugale Satan...
 Mall eo d'eoc'h dont d'hor sikour
 Ha d'hon tenna a boan.

4

Diouallit na iavarfe
 An dud fall'zo er bed :
 Gwechall ez oa Mamm-Doue
 Dous hag eas da garet ;
 He diskouarn a oa tano,
 Klevet a rea raktal,
 Hirio ez eo pounner-gleo,
 Outi eo red krial.

5

Nann, nann. O ! tavit pelloc'h,
 Rak Mari, tud difeiz,
 Morse na d'eo bet tommoc'h
 He c'haloun en he c'hreiz ;
 Gwelet eo bet o lenva
 War gern ar menezioù,
 Bemdez eman o paea
 Hon dle gant he daelou.

6

Ar pastor hag an denved
 O dezo eun ehan ;
 An aour pa vez peur-garzet
 A denner eus an tan.
 Bremañk Jesus a roio
 E dra da bep hini :
 D'ar re fall poaniou garo,
 Ar peoc'h da dud Mari.

Gant ho sikour, ô Mari,
 Holl vugale Bro-C'hall
 O deus gellet enebi,
 Ken dispount ha leal ;
 Gwelet hon deus o gened,
 O nerz, o vaillantis.
 Biken ne vo diskaret,
 Merc'h hena an Ilis.

Patronez dous ar Folgoat.
 Hor mamm hag hon Itron !
 An dour en hon daoulagad
 Ni ho ped a galon.
 Diouallit an eneou,
 Dichadenn eo Satan,
 Selaouit hor pedennou
 Pe hor bro vo d'ezan

Bras eo bet hor pec'hejou,
 Dister hor pinijenn ;
 Rak-se e dourn an Aotrou
 E chom ar wialenn.
 Red eo gounid hor barner
 Pe diwada er pri.
 Ahaz ! n'hellomp hen ober
 Nemet dreizoc'h, Mari !

Pell 'zo c'houi 'zo bet choazet
 Evid hor rouanez ;
 E neb bro n'ho peus kavet
 Teneroc'h karantez.
 Tud fidel a vandennou
 A deu d'ho kaout bep bloaz,
 Ha war hent ho chapeliou
 Ne jom eur yeotenn c'hlaaz.

11

O tifenn gwir an Iliz
 'Z eus bet tud eus hor bro ;
 Pell diouz lanneier Breiz
 E kavjont ar maro.
 Ni n'omp ket tud a vrezel,
 Mes rei reomp aluzenn,
 Hag o vont d'an Tad Santel
 Hor gwennege 'zo laouen.

12

Astennit-ta ho tivreac'h
 Azioc'h ar Frans, ho pro,
 Deuit, Guerc'hez, parit en neac'h
 Evel gwareg ar glao.
 Ar gwareg-se 'ziskoueze
 Ne vije mui dour-beuz,
 Hag e tistro gras Doue
 D'ar re a ziskouez keuz.

13

Salaun, war skourr e wezenn
 Evit kaout e vara,
 Ne lavare ken pedenn
 Nemet : O Maria !...
 Emaomp en Iliz Santel
 Savet war bez ar foll,
 Mari ! Ni deu d'ho kervel :
 Mirit n'ez aimp da goll !

(Droits réservés)

IMPRIMATUR :

Quimper, 25 Août 1923.

A. COGNEAU, vic. gén.